



Kelennerien skol DIWAN, ur vicher evit an dazont

Kaozeal a rit brezhoneg
Plijout a ra deoc'h labourat gant ar vugale,
labourat a skipailh,
kemer intrudu
C'hoant ho peus da labourat e brezhoneg,
da gas ar yezh war-raok
Prest oc'h d'en em stummañ

AN TUTA

- **Un diplom live BAC + 3** ho peus bet/ho po a-benn an distro-skol (aotreegezh pe diplom kevatal war ne vern peseurt danvez).
- **Brezhoneg a gomzit hag a skrivit**
mat a-walc'h evit heuliañ ur stummadur e brezhoneg
ha bezañ gouest da gelenn e brezhoneg e fin ur bloavezh stummañ (*)
- **Goulennit un teuliad digant**
DIWAN, BP 147, 29411 LANDERNE Cedex
en ur gas ul lizher hag ho CV.
Evit kaout titouroù ouzhpenn : **02.98.21.34.95**
pe **diwan.rannarchelenn@wanadoo.fr**
- **Pedet e voc'h gant Diwan da dremen dirak ar Bodad degemer er stummadur :**
 - Priziet e vo ho live brezhoneg dre skrid ha dre gomz,
 - Ur pennad kaoz hag ur briziadenn ho po gant ur psikologour-tutaer,
 - Ur pennad kaoz ho po gant izili ar Bodad Tuta
- **Degemeret e voc'h evel studier er Master MEF - Kelenn divyezhek dre soubidigezh brezhoneg-galleg.**
Kinniget e vo ar stummadur e kreizenn-stummañ DIWAN, KELENN e KEMPER, diwar kenlabour gant Skol-Veur Perpinyà-Perpignan.
- **Digoust eo ar stummadur** evit ar studierien ; kemeret e vez ar c'houst e karg gant Diwan.
- **Skoazelloù arc'hant** : yalc'had SKOAZELL (Kuzul Rannvro Breizh), yalc'had KSDS,
Alioù a c'helloc'h kaout gant KELENN.

(*)

AR STUMMADUR EN EM VARREKAAT WAR AR BREZHONEG "Mestroniañ brezhoneg da yezh kelenn"

Kinnig a ra KELENN ur bloavezh rakstummadur war ar yezh evit an danvez-stajidi n'o do ket c'hoazh ul live uhel a-walc'h e brezhoneg evit heuliañ ar stummadur war ar vicher.

Titouroù gant

KELENN - 3 straed Vendée - 29000 KEMPER

pgz : 02 98 95 55 99

kelenn2@wanadoo.fr

AR STUMMADUR

Aozet eo ar stummadur evit klotañ gant daou zoare da duta :

- skolaerien gant ur CDI DIWAN, evit ar postoù nann-kontradet gant ar Stad,
- kelennerien skol evit ar postoù kontradet gant an Deskadurezh Stad.

Aozet e vez ar stummadur e KEMPER gant KELENN. Stag eo KELENN, kreizenn stummañ kelennerien DIWAN ouzh an ISLRF- Institut Supérieur des Langues de la République Française.

Diwar kenlabour gant Skol-Veur Perpinyà-Perpignan e kinnig KELENN

ur **Master desaverezh ha stummadur MEF -**

Kelenn divyezhek dre soubidigezh brezhoneg-galleg.

Deiziadoù : eus ar meurzh 6 a viz Gwengolo 2011 d'ar yaou 5 a viz Gouere 2012.

Padelezh : 1 110 eurvezh (stummadur leun amzer, eus al lun d'ar gwener)

Ar poentoù bras er stummadur

1. Klokaat ar barregezhioù war ar brezhoneg,

gant ar pal pakañ ul live brezhoneg uhel a-walc'h evit kelenn ha bevañ e brezhoneg e kement degouezh eus buhez ar skol.

2. Reiñ ur stummadur diazez war ar vicher.

2.1. ul lodenn deorikel : kentelioù e brezhoneg pe e galleg

Diazezet eo ar stummadur war :

- ar barregezhioù e pep danvez skol,
- an didaktelezh,
- an divyezhegezh dre soubidigezh hag he ferzhioù er c'helenn.

2.2. stajoù er skolioù Diwan evit anavezout buhez ar skolioù, ha lakaat e pleustr ar stummadur teorikel. Degemeret e voc'h e klasoù eus pep kelc'hiad ha, goude ur prantad en em varrekaat, ho po tro da gemer ur c'hlas e karg. Skoazellet e voc'h gant heñcherien a roio alioù deoc'h, hag a sikouro ac'hanoc'h da vuzuliañ ho ezhommoù hag ho araokadennoù.

3. Kas ul labour klaskerezh.

Un teuliad master a zo da sevel war ur poent a denno d'ar bedagogiezh en ur skol divyezhek dre soubidigezh.

4. Prientiñ ar genstrivadeg diavaez kelennerien skol

War ar memes patrom hag ar genstrivadeg evit ar skolioù publik (memes danvezioù, memes arnodennoù) met kenstrivañ a reer evit postoù er skolioù DIWAN.

An titladur

Gant ar master e c'hellloc'h tremen ar genstrivadeg diavaez kelennerien skol.

Validet e vez an disoc'hoù gant an Deskadurezh Stad ha gant Diwan.

Gouest e voc'h ivez da c'houlenn bezañ tutaet evel skolaer gant Diwan gant ur c'hontrad didermen (CDI) hep bezañ kontradet gant ar Stad.